

Reglamant a Furnez.

(267, suite)

Rentit oll d'ho Grouer qement zo ret renta,
 Examinit aroc antrepreni netra;
 Ne zarempredit get nemet tud vertuzus,
 Ne estimit get re ho talantchou eürus;
 En em rentit atao da rêsoniou re-all,
 Ha dilezit ho re, mar prouwer ez int fall. (268)
 Grit attention vad ouzoc'h, pa ve comzet,
 Ha ne fouqueit get da gaout calz a speret;
 Ne antrietenit den entuont eus e stat,
 Hac en ho proposiou bezit leal ha mad.
 Dale'hit bepret d'ho comz evel eun den güirion,
 Ne brometit bigen evel tud dirêson.
 Bezit servichus, fur, graciüs, douç, affabl,
 Eus a ziguemer vad, laouen ha favorabl.
 Hep berza familhier, ho pet eun der êzet;
 Ne zecidit netra gen ho po er poezet.
 Carit hep interest, pardonit hep sempldet;
 Sujit d'ar re buissant, hep lausqentez ebet.
 Clasqit gant soign goumit carantê peb-unan;
 Tec'hit ouz peb proces, sourcez eus a vil boan.
 N'ez em informit get ouz afferadou re-all,
 Ha tavit var ho re, pe int zo mad pe fall.
 Gfemerit a c'hraç vad ha gant anoudequez,
 Ha mar recompancit, grit-én gant bargquentez.
 Neus cäs en peç seurt ec'h affec'h ez em gaset,
 Ne deuit birvigen d'ez em dishanaout. (269)
 Ho pet atao truez ouz maleur ho nessa,
 Supportit e zefaut, bezit mignon dezã.
 Bezit trec'h d'ar chagrin, mar er santit bigen,
 Ha n'er laqit james da güeza var nep den.
 El lec'h ma ve drouc-ranç laqit ar peoc'h bepret,
 N'ez em venjit nemet dre vad-ober barfet.
 Reprenit hep c'hoeroder, meulit hep flatterez,

C'hoarzit modestamant, souffrit ar farcerez.
 Estimit pepini ebars en e richer;
 Ne voapaît netra dre lompad diroder.
 Ne rebechit bigen ar vad ho pezo grêt,
 Ha laqit-e atao en renq ar traou secret.
 Diaroguit ezom eur mignon maleürus;
 Hep beza re brodig, bezit mad, generus.
 Moderit hoc'h humor qerqent m'en em bresant,
 Ha ne z'fijoug-comzit get demeus ar re absant.
 Ne vezit get ingrat ha bevit hep tamal,
 Hac ebars ho jeuyou bezit atao leal.
 Sonjit ha comzit mad, ne dromplit den abet;
 Bezit contant eus ar pezo a vezo d'ec'h roet.
 Ne voal-drêht bigen ho paour-geaz dleour;
 Bezit just, servichus, memes d'hoc'h adversour.
 Da voueur ho nessa avy ne zouguit get,
 Ha tavit var ar pezo a vo d'ec'h confiet.
 N'en em vantit bigen, mirit mad ho secret;
 Bet Doue evit scoier, hac e vist parfet.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 267-270.)